

F. Broudic

ISSN 0249-6496

**ROLL AR SKRIDOU
BET EMBANNET
E BREZONEG E 1986**

Bibliographie des publications
en Langue Bretonne.
Année 1986

STUDI N° 34

Mezeven/Juin 1988

Section de Celtique
Centre de Recherche Bretonne et Celtique
Faculté des Lettres de Brest
Université de Bretagne Occidentale

Imprimé et diffusé par le C.R.D.P.
(Centre Régional de Documentation Pédagogique)
Rennes

"La loi du 11 Mars 1957 n'autorisant, aux termes des alinéas 2 et 3 de l'article 41, d'une part, que les copies ou reproductions strictement réservées à l'usage privé du copiste et non destinées à une utilisation collective et, d'autre part, que les analyses et les courtes citations dans un but d'exemple et d'illustration, toute représentation ou reproduction, intégrale ou partielle, faite sans le consentement de l'auteur ou de ses ayants droit ou ayants cause, est illicite (alinéa 1er de l'article 40). Cette présentation ou reproduction, par quelque procédé que ce soit, constituerait donc une contrefaçon sanctionnée par les articles 425 et suivants du Code Pénal".

ISSN 0249-6496

F. Broudic

**ROLL AR SKRIDOU
BET EMBANNET
E BREZONEG E 1986**

Bibliographie des publications
en Langue Bretonne
Année 1986

STUDI N° 34

Mezeven/Juin 1988

Section de Celtique
Centre de Recherche Bretonne et Celtique
Faculté des Lettres de Brest
Université de Bretagne Occidentale

Imprimé et diffusé par le C.R.D.P.
(Centre Régional de Documentation Pédagogique)
Rennes

(
(LES ADRESSES CONCERNANT "STUDI")
()

RESPONSABILITE SCIENTIFIQUE

MM. Jean LE DU et Yves LE BERRE

Faculté des Lettres et Sciences Sociales,
Section de Celtique,
20, avenue Victor le Gorgeu,
BP 860, 29279 BREST CEDEX

Tel : 98 03 06 87

IMPRESSION - DIFFUSION - ABBNEMENTS

C. R. D. P.
Centre Régional de Documentation Pédagogique

92, rue d'Antrain,
BP 158, 35003 RENNES CEDEX

Tél : 99 28 78 58

C.C.P. RENNES
20041.01013. 09404 75 C 034. 66

A NOS LECTEURS

Nous avons le plaisir de vous présenter la cinquième bibliographie annuelle des publications en langue bretonne réalisée par Fañch Broudic.

C'est la bibliographie de l'année 1973 qui a constitué le premier volume de notre collection, en 1974. Nous avons publié depuis lors celles des années 1974, 1975; après quelques années, est paru un nouveau coup de sonde sur l'année 1983, pour en arriver aujourd'hui à l'année 1986. Nous allons donc disposer, grâce à ce travail minutieux et exhaustif, d'un outil précieux qui permettra de mesurer avec précision l'évolution de la publication en langue bretonne.

L'image publique de la langue bretonne a évolué de façon très sensible au cours de ces années. Notre revue est née à un moment où la revendication culturelle régionale était vive. Il était de bon ton, en ces temps agités, d'accuser le service public de l'Education nationale d'avoir été directement la cause du recul de la pratique de la langue bretonne: collaborer avec le CRDP - donc les pouvoirs publics - n'était donc pas considéré d'un très bon oeil chez les partisans les plus zélés de la renaissance bretonne.

Attachés depuis toujours au service de l'Education nationale, nous avons persisté contre vents et marées, pour nous apercevoir qu'au bout du compte l'aide financière publique à l'édition d'ouvrages en breton ou d'intérêt régional, loin de continuer à être méprisée, était désormais accueillie favorablement par toutes les associations de défenseurs du breton. Malheureusement, notre petite revue, qui, malgré la faiblesse de ses moyens a publié nombre d'ouvrages de premier plan, ne profite en aucune façon de ces progrès: elle demeure une revue du service public, et n'a donc pas besoin d'aide..

Nous poursuivons cependant notre tâche, en espérant que viendra le jour où sera reconnue la valeur de la tâche que nous-mêmes, et nos auteurs bénévoles, poursuivons dans une perspective scientifique.

Jean Le Dù et Yves Le Berre

Directeurs scientifiques de la collection

()
 (GAND AR MEMEZ SKRIVAGNER)
 ()
 (DU MEME AUTEUR)
 ()

- Roll al leoriou hag ar pennadoù bet embannet e brezoneg e 1973 = Bibliographie des publications en langue bretonne. Année 1973. - Studi, n° 1, 114 p.

- Roll al leoriou hag ar pennadoù bet embannet e brezoneg e 1974 = Bibliographie des publications en langue bretonne. Année 1974. - STUDI, n° 5, 1976, 136 p.

- Roll al leoriou hag ar pennadoù bet embannet e brezoneg e 1975 = Bibliographie des publications en langue bretonne. Année 1975. - STUDI, n° 10, 1979, 124 p.

- Al liberterien hag ar brezoneg. Brug : 1913-1914. - Brest : Brud Nevez, 1983. - 284 p. - (Priz Per Roy).

- Ar bed o trei. Eun dibab a skridoù a vremañ evid ar skolioù brezoneg. - Brest : Brud Nevez, 1983. - 53 p.

- Langue et littérature bretonnes. Bibliographie : 1973-1982. - Brest : Brud Nevez, 1984. - 288 p.

- Roll al leoriou hag ar pennadoù bet embannet e brezoneg e 1983 = Bibliographie des publications en langue bretonne. Année 1983. - Studi, n° 30, 1986, 109 p.

()
 (EUR GER KENTA)
 ()
 ()

Skridoù brezoneg ar bloavezioù 1973, 1974, 1975 ha 1983 ah eo bet embannet ar roll anezo dija e "Studi", en amzer dremenet. Sed amañ eta roll ar bloavez 1986, pa 'm-eus kavet eun doare èsoh, ha buannoh sañset, da zevel anezañ, en eur labourad gand eur homputer. Setu ma vo kavet eun toulladig nevezentiou el labour-mañ.

Ar chenchamanchou a zo da venegi dreist-oll e-keñver ar bloavezioù all eo ar re-mañ : da genta, n'eus lodenn ispisial ebed ken evid an troidigezioù, e rann al "lennegez" : eur steredenn * am-eus kavet gwelloc'h lakad, penn-da-benn al labour, dirag an oll droidigezioù. Er memez doare, eo bet laket ar zin = da verka al leoriou, forz peseurt doare leor eh int. A-wechou e vez savet, ar memez skrid e diou yez (peurliesha brezoneg ha galleg) : keñver-ha-keñver e vo laket an daou ditr.

* * *

Tammou statistikou zo bet gallet tenna dija deuz rollou ar bloavezioù all (1). Diwar hini ar bloaz-mañ, e heller ober konchou, kerkoulz all. Setu int amañ.

AL LEORIOU.

Evid pezh a zell ar gont a leoriou a zo bet moulet e brezoneg e 1986, en em gaver gand 68, da lared eo gand 7 muioh evid na oa bet e 1983, pa oa bet embannet 61 er bloavez-ze. Kalz uhelloc'h eo ar gont a 68, evel just, evid an hini a 32 a leoriou a oa bet embannet beb bloaz, well-waz, euz 1973 da 1975. Dispartia a heller leoriou 1986 evel-henn :

- 60 a zo leoriou "gwir" anezo. Med nebeutoc'h evid 50 pajenn o-deus 29 anezo, hag ar re a ra muioh evid 200 pajenn a zo 10. E-keñver 1983, a zo just kement ha kement a leoriou moan - leoriou bugale int dreist-oll - med n'eus ket muioh a leoriou teo.

- 8 a zo niverennoù kelaouennoù, bet savet gant eur skrivagner hepken pe diwar eun danvez hepken. N'eur ket techet ken, pe nemeur, d'embann seurt niverennoù ispisial deuz kelaouennoù, o veza moarvad ma h eo kalz êsoh moulla leoriou diwar vremañ, hag e vez roet sikourioù evid se.

Evid peza zell al leoriou "gwir", eh int bet laket e gwerz e 1986 gant 19 embanner en oll, pa ne oant c'hoaz nemed 10 e 1983. Gand 11 anezou avad, n'eus bet nemed eul leor hepken o tond er-mêz; med 2 deuz ar re-mañ (Plon ha Garnier) a zo Parizianed, peza a zo digustum. Ma klasker renka an embannerien hervez ar gont a leoriou o-deus moulllet, en em gaver gant al listenn-mañ :

1. "Ar Helenner" : 14 leor
2. "Moulladurioù Hor Yezh" : 11 leor
3. "An Here" : 9 leor
4. "Al Liamm" : 4 leor
5. "Brud Nevez" : 4 leor
6. "Cholori" : 3 leor
7. "Keit vimp bev" : 2 leor.
8. "Ar Skol Vrezoneg" : 2 leor.

Taoler pled a ranker eh eo leoriou bugale hepken a zo bet embannet gant tri euz an embannerien ("Ar Helenner", "An Here", "Cholori"), ha Bannou Treset gant unan all ("Keit vimp bev").

AR SKRIDOU.

E 1973, e oa bet dastumet 930 a referañsoù en oll, leoriou pe pennadoù-skrid, hag ar muia ma zo bet tro da zastum biskoaz a oa 1.059 ar bloaz war-lerh. E 1983, n'em-oa kavet nemed 787, peza a oa eun digresk a 20% e-keñver ar bloavezioù 1973-75. E 1986, en em gaver adarre gant eun digresk, peogwir n'eus bet dastumet nemed 706 a referañsoù evid ar bloaz. Sed a ra 10% nebeutoù c'hoaz.

E kelaouennoù pe kazetennoù an hini eo bet embannet, evel boaz, ar peb brasa deuz ar referañsoù. Ne ra an 60 a leoriou "gwir" nemed 8,5% anezou, pa ra ar pennadoù-skrid 91,5%.

AR HELAOUENNOU.

E 1986, n'eus bet kontet nemed 33 a gelaouennoù en oll hag a vefe bet moulllet e brezoneg penn-da-benn, pe o-deus bet moulllet pennadoù e brezoneg - ha c'hoaz a zo unan hag a zo chomet a-zao kerkent hag an eil niverenn. Nebeutoù eo evid e 1983 - er bloavez-zê, e oa bet kontet 39 - ha kalz nebeutoù evid an 48 a oa bet kontet etre 1973 ha 1975. Evid 1986, e heller ingala anezou evel-henn :

- tost d'eun hanter anezou : 15, o-deus embannet nebeutoù evid 10 pajennad a-hed ar bloavez
 - 8 o-deus embannet etre 11 ha 100 pajennad
 - 4 etre 101 ha 200 pajennad
 - 6 o-deus embannet muioù evid 200 pajennad.

Ar re hag a embann ar muia eo, da genta, "Brud Nevez", heuillet gant "Imbourc'h", "Hor Yezh", "Al Liamm", "Cholori", "Nevez-Haftv" ha "Planedenn." Ma vefe renket ar helaouennoù avad hervez ar gont a referañsoù a zo bet tennet diouto, eh eo "Bremañ" en em gav er penn kenta (gant 125 a referañsoù), hag "Al Liamm", "Al Lañv", "Brud Nevez" ha "Cholori" war-lerh.

E-keñver 1983, zo 12 a gelaouennoù, pe n'eus ken anezou, pe n'int bet deuet er-mêz e 1986, din da houzoud, pe n'o-deus ket moulllet an disterra pennad e brezoneg. Bez' eh int : "L'Avenir de la Bretagne", "Bleu-Brug", "Chronique de Landévennec", "Dastum", "Dihun", "Douar Breizh - République Bretonne", "Evid ar Brezhoneg", "An Nerzh", "Le Pays Breton", "Skol", "Skrid", "Telennourien Vreizh". E plas ar re-mañ, e kaver 6 kelaouenn all hag a zo bet embannet pe adembannet e 1986, gant pennadoù brezoneg enno : "Bro Nevez", "Kumunioù Breizh", "Kannadig Ker Vreizh", "Nevez-Haftv", "Le Peuple Breton", "Tabouliner".

Ma ne vefe ket euz ar helaouennoù e brezoneg penn-da-benn, e vefe embannet kalz nebeutoù a vrezoneg. Ar re-mañ avad, hag a oa 18 e 1975, n'eus ken mui nemed 10 anezou e 1986. Int-i koulskoude eo o-deus embannet 70% deuz ar referañsoù bet dastumet ar bloaz-mañ (e diavaez al leoriou). Embannet eo bet an 30% all e 23 a gelaouennoù "diou-yezeg", hag eo bihan peurliesha lodenn ar brezoneg enno e-keñver hini ar galleg, pe e-keñver ar saozneg, zoken ma zo lod anezou hag a zo kontet evid beza deuz an "Emzao".

AR PAJENNADUR.

Nebeutoù a leoriou, nebeutoù a gelaouennoù ha nebeutoù a referañsoù a zo bet embannet e 1986, med muioù a bajennou. Well-waz, ne ree peb skrid nemed 5,6 pajennad e 1973; e 1983, e ree 10,4; hag e 1986 e ra 14,9.

Rag en oll eh eo 10.503 pajennad a vrezoneg (2) a zo bet embannet e 1986, pa ne oa bet nemed 8.470 tri bloaz kentoh. Sed a ra eur hresk a 25% kazimant. War nebeutaad eh a bepred ar pajennadoù liesskrivet, pa ne reont ken nemed 10,4% deuz an oll. Moulllet eo e vez bremañ 90% deuz ar skridou brezoneg, en doare koz pe dre offset.

E gwirionez, ma ne zeller med deuz ar pajennadur, e vez embannet kalz nebeutoh a bennadour-skrid er helaouennou evid na vez embannet a leoriou. Gand ar helaouennou n'eus bet moulet nemed 3.421 pajennad, e-keid ha ma zo bet moulet 7.082 e 1986 dindan stumm leoriou, pezh a ra dregantajou a 67,4% evid an eil rumm ha 32,6% evid egile. Dija, e oa krog an embannadurioù da vond war an tu-ze e 1983, med er bloaveziou 1973-75, e oa ar hontrou, peogwir eo er helaouennou ma kave bod neuze 75% deuz ar skridou brezoneg. E 1986, e ra eul leor, well-waz, 118 pajennad, hag eur skrid en eur gelaouenn, 5,3.

AR SKRIVAGNERIEN.

Dizano eh eo 19% euz ar referansou, da lared eo 2.453 pajennad. Gand 323 a dud eh eo bet savet ar skridou hag a zo eur zinatur dindanno, da lared eo gand ar memez kont a dud a oa bet e 1974, war veteg unan - 1974 o veza bet ar bloaveziad kreñva diwar ar 4 hag a oa bet studiet beteg-henn.

War an daolenn war-lerh, eh eo bet renket ar skrivagnerien hervez ar gont a referansou a zo da lakad war ano pep hini anezo :

Referansou dre skrivagner	Skrivagnerien niver	%	referansou %
1	214*	66,3*	35,1*
2	53	16,4	17,4
3	22	6,8	10,8
4	13	4,0	8,5
	88*	27,2*	36,8*
5 hag ouspenn	21*	6,5*	28,1*

Evel ar bloaveziou all, ne h embann an 2/3 deuz ar skrivagnerien nemed an 1/3 euz ar skridou. Med nebeutoh emaint hag o-deus 5 a referansou da nebeuta war o ano - e 1983, e oant 10,7% - ha biannoh eo ive an dregantad a referansou a zo da lakad war o hont - 46,5% a oa tri bloaz zo. Kreñveet eo ar rummad etre avad : niverusoh eo ar re o-deus 2, 3 pe 4 a referansou war o ano, ha brasoh eo ive an dregantad a referansou a zo war o ano.

Ar re hag o-deus ar muia a skridou war o ano eo :

- 26 : Tadevab
- 15 : Ar Stourmer
- 13 : Mikael Madeg

- 12 : Daniel Doujet, Paskal ar Marc'heg
- 9 : Mabadad
- 7 : Roparz Hemon, Perig Kof-Ruz, Yann Mikael
- 6 : Visant an Askol, M.K., Lukian Kergoat
- 5 : Laorans ar Bleiz, Per Diolier, Joel Donnat, Visant Fave, A. Heusaff, Yann-Fañch Jacq, Youenn Olier, Yann-Ber Tillenon, Treleger.

Ma vez renket ar skrivagnerien hervez ar gont a bajennadou a zo da lakad war o hont, eh eo M. Madeg en em gav an hini kenta :

- 1. Mikael Madeg : 605 pajennad
- 2. Per-Jakez Helias : 554
- 3. G. Ricou : 373
- 4. Abeozen : 361
- 5. Ronan Le Gléau : 352.

6 skrivagner o-deus embannet etre 200 ha 300 pajennad : R. Delaporte, Youenn Drezen, Roparz Hemon, Job Jaffre, F. Kervella, Jakez Konan. Eur 15 all a zo bet oh embann etre 100 ha 200 pajennad : K. Brisson, F. Broudic, Cervantes, Per Denez, R. Gargadennec, Yann Gerven, Garmenig Ihuellou, Y.B. Calloc'h, L. Kergoat, an tad Medar, Y. Miossec, Meven Mordiern, Youenn Olier, Jef Philippe, hag all...

Diwar ar skrivagnerien, zo c'hoaz daou pe dri dra da zisplega. Da genta, zo bet 67 anezo, din da houzoud, hag o-deus dibabet eun ano-pluenn : sed hag a ra 20% pe war-dro euz an oll anoioù hag a zo e-barz listenn ar bloaz-mañ. D'an eil, eh eo skriva e brezoneg eur vicher gwazed. Ma lezer a gostez 11% euz ar skrivagnerien hag eo diêz gouzoud pe baotred pe blahed int (anoioù strolladou, ar sinaturioù ha n'eus nemed penn-lizerennou anezo...); n'eo ar merhed nemed 10,2% deuz auto, peogwir n'int ket muioh evid 33 en oll, pa zo bet kontet 255 a wazed, da lared eo 79%. D'an trede, 23 a dud eo o-deus savet troidigeziou : ar re hag o-deus ar muia war o ano eo ar re o-deus troet leoriou bugale, Charlez ar Gall (14 troidigez) ha Martial Menard (6 troidigez).

Evid ar bloavezh 1983 dija, e oa bet taolet evez e oa bet cheñchet kalz ar skrivagnerien e-keñver ar bloaveziou 1973-75. Gwir eo kement-mañ c'hoaz evid 1986, peogwir n'eus nemed 89 a zinaturioù, da lared eo 27,6%, hag a oa bet embannet skridou ganto e 1983 hag o-deus greec c'hoaz e 1986. En oll, n'eus nemed 27 skrivagner hag o-defe bet embannet tra pe dra e-kerz an tri bloavezh 1973, 1983 ha 1986, pezh a ra 8,4% nemetken deuz ar skrivagnerien a zo bet kontet e 1986. Tud zo hag o-deus bet skrivet e brezoneg ne reont ket ken; tud all, ne reont ket araog, a ra bremañ.

AN DOAREOU-SKRIVA.

Gouzoud a oar an oll pegen kizidig eo lod deuz ar vrezonegerien e-keñver afer an doareou-skriva. Mad em-eus kavet eta klask ober evid ar wech kenta eur studi deuz an implij a vez greet deuz an eil doare-skriva ha deuz egile. Ma lezer eun nebeudig referañsou a gostez (hag a zo e KLT koz, pe war eun dro e gwenedeg hag e peurunvan...), sed amañ penaoz eo dispartiet an doareou-skriva, war an daolenn war-lerh :

Doare-skriva	Referansou :		Pajennadur :	
	niver	%	niver	%
Etrerannyez.	21	3,0	251	2,4
Gwenedeg	33	4,7	393	3,7
Peurunvan	525	74,4	5548	52,8
Skol-veur	124	17,6	3928	37,4

Gwelad a reer eo en doare "peurunvan" an hini eo bet moulet an 3/4 euz ar referañsou, med eun tamm bihan muioh evid 1/2 euz ar pajennadou nemetken : sed hag a ra, well-waz, 10,6 pajennad evid pep hini deuz ar referañsou. Doare-skriva "ar skol-veur" ema war e gont nebeutoh evid 1/6 deuz ar referañsou ha muioh evid 1/3 euz ar pajennadou, pez a ra, well-waz, 31,6 pajennad evid pep hini deuz ar referañsou. An daou zoare-skriva all, "gwenedeg" hag "etrerannyezhe", a zo kalz nebeutoh a skridou hag a bajennadou da lakad war o hont.

Evid pez a zell al leoriou "gwir", 32 anezo eo en doare "peurunvan" int bet embannet e 1986, hag e reont 3.245 pajennad, da lared eo 30,9% euz an oll bajennadou embannet e brezoneg e-pad ar bloaz. E doare-skriva "ar skol-veur", zo bet moulet 23 leor, med tost da gemend-all a bajennadou hag en doare-skriva all, peogwir e ra al leoriou-mañ 3.133 pajenn, da lared eo 29,8% euz an oll skridou brezoneg. Well-waz, e ra eul leor 101 pajenn en doare-skriva "peurunvan", ha 136 e doare-skriva "ar skol-veur". Ma laker a-gostez al leoriou-bugale, e ra eul leor 132 pajenn, well-waz, en doare peurunvan, ha 323 pajenn e doare ar skol-veur.

Evid pez a zell ar helaouennoù, 20 a zo hag a vez skrivet e "peurunvan" hag e reont 70% deuz ar referañsou ha 22% euz an oll bajennou. E doare "ar skol-veur", emaint 7 oh ober 14,3% euz ar referañsou ha 7,6% euz an oll bajennou. O veza dibabet an doare "etrerannyezhe", a zo 4 gelaouenn, hag o terhel d'ar gwenedeg, zo 1. E-kerz ar bloavezh, he-deus cheñchet "La Liberté du Morbihan" deuz ar gwenedeg koz evid embann bremañ e "peurunvan."

E "peurunvan" eo o-deus skrivet al lodenn vrasa deuz ar skrivagnerien, e 1986, evel a ziskouez an daolenn war-lerh :

Doare-skriva	Niver skrivagn.	%
Etrerannyezhe	19	5,9
Gwenedeg	17	5,3
Peurunvan	237	73,4
Skol-veur	47	14,6

AN DANVEZ.

Petra 'ta zo bet moulet e brezoneg e 1986, evid pez a zell an danvez ? Sed amañ penaoz e heller ingala an 9 rann a zo barz ar roll :

NOTENNOU :

- (1) Evid kênveria gand ar bloaveziou araog, e heller lenn ar studiadennoù bet embannet ganin war "Brud Nevez", an n° 26 euz ar bloavezh 1979, hag an n° 83 euz 1985; hag an hini halleg "La production écrite de langue bretonne de 1973 à 1983 : approche statistique", embannet e "Mémoires de la Société d'Histoire et d'Archéologie de Bretagne", levrenn LXII, 1985.
- (2) Addigas a ran da zont e ra eur bajennad... eur bajennad ! Ne zalhan ket kont euz ar vent m'eo bet embannet. Daoust ma zo eun diforh a bouez etre eur bajennad euz "Cholori" hag unan all deuz "Hor Yezh", lakom. Diêz-spontuz e vefe konta en eur mod all. N'eus nemed evid ar pennadou moulet war eur gazetenn pemdezieg pe sizunieg (re "La Liberté du Morbihan", da skwer), hag a gontan eur bajennad evid pep hini anezo : war ar gazetenn emaint pell deuz karga ar bajenn; ma vefent moulet en eur gelaouenn vrezoneg ordinal e rafent, hag a-wechou ouspenn.

Ar rannou	Ar referañsoù		Ar pajennadur	
	niver	%	niver	%
Jeneraliteou	34*	4,8*	234*	2,2*
Relijion	15*	2,1*	398*	3,8*
Skianchou sosial	116*	16,4*	296*	2,8*
Politik	54	7,6	193	1,8
Brezoneg	94*	13,3*	2723*	25,9*
Arzou, didu.	54*	7,6*	55*	0,5*
Lennegez	324*	45,9*	6033*	57,4*
Barzonegou	54	7,6	779	7,4
Peziou-c'hoari	5	0,7	271	2,6
Romanchou	9	1,3	1305	12,4
Danevellou	42	5,9	752	7,2
Eseou	42	5,9	334	3,2
Envorennoù	9	1,3	1089	10,4
Bugale	76	10,8	711	6,8
Kananouennoù	34	4,8	160	1,5
Kritik	37	5,2	257	2,5
Istor	28*	4,0*	331*	3,2*
Broiou, poblou	31*	4,4*	403*	3,8*
Skianchou, tekn.	9*	1,3*	27*	0,3*

Talvezoud a ra ar honchoù hag a zo eur steredenn * war o lerb evid eur rann en e bez. E 1986, evel er bloaveziou all, eo rann al lennegez hag a zo, euz a bell, an hini kretva, gant 46% euz ar referañsoù ha 57% euz ar pajennou : d'al lennegez e tenn eun hanter deuz ar pez a gaver da lenn e brezoneg. En eil renk, e kaver ar skianchou sosial hag ar politik, evid pez a zell ar referañsoù da vihanha, med evid pez a zell ar pajennou, eo rann ar "brezoneg hag ar yezou all" en em gav da eil. Ahendall, n'eus nemed rann an "arzou ha diduamanchou" o tidremen 5%. evid pez a zell ar referañsoù nemetken. Dindan 5% em a an oll rannou all, koulz evid pez a zell ar referañsoù hag evid pez a zell ar pajennadou.

E rann al lennegez, eo ar skridou evid ar vugale ar re niverusa. War-lerh, e teu tro ha tro ar barzonegou, an danevellou hag an eseou. Notenni a vo grest zo bet embannet 9 romant e 1986, ha 42 danevell (39 e gwirionez, rag 3 dastumad a zo). Evid pez a zell ar pajennadou, eo ar romanchoù an teva, ha war o lerb, e kaver an envorennoù hag ar barzonegou.

Ar memez doare taolenn hag an hini a-uz a heller sevel evid dispartia al leoriou dre zavez :

Ar rannou	Al leoriou		Ar pajennadur	
	niver	%	niver	%
A beb seurt	3*	4,4*	102*	1,3*
Relijion	2*	2,9*	346*	4,4*
Politik	2*	2,9*	102*	1,3*
Brezoneg	8*	11,8*	2281*	28,7*
Geriaduriou	5	7,4	1565	19,7
Lennegez	51*	75,0*	4760*	59,9*
Barzonegou	3	4,4	650	8,2
Peziou-c'hoari	2	2,9	235	3,0
Romanchou	7	10,3	1127	14,2
Danevellou	3	4,4	502	6,3
Eseou	2	2,9	266	3,3
Envorennoù	4	5,9	984	12,4
Bugale	23	33,8	420	5,3
Bannou Treset	2	2,9	48	0,6
Kananouennoù	2	2,9	104	1,3
Kontadennoù	2	2,9	309	3,9
Kritik	1	1,5	115	1,4
Istor	1*	1,5*	150*	1,9*
Broiou, poblou	1*	1,5*	200*	2,5*

Talvezoud a ra bepred ar steredenn * war-lerh eur gont evid eur rann en e bez. Med kontet eo an dregantad a referañsoù hag hini ar pajennou diwar ar gont a 68 a leoriou (60 a leoriou "gwir" hag 8 niverenn ispisial a gelaouennoù), ha diwar ar 7.942 pajennad a zo enno (7.079 el leoriou "gwir", ha 863 er helaouennoù).

Anad eo eo d'al lennegez e tenn an 3/4 euz al leoriou a zo bet embannet e 1986, ha 60% deuz ar pajennou. Ar re niverusa, hag euz a galz, eo al leoriou bugale, gant ar romanchoù war o lerb, ha goude ze ar barzonegou, an danevellou hag an envorennoù. Leoriou diwar ar yez, ha geriaduriou dreist-oll, a zo 8. Techet eo ar re-mañ da veza tevoh evid al leoriou lennegez. Di ja e oa bet gwelet kemend-all er bloaveziou araog : lennegez ha yez eo ah a, araog peb tra, d'ober danvez ar skridou brezoneg.

Lavarom ouspenn a zo da nebeuta 7 deuz al leoriou hag a zo adembannadurioù anezo, hag a zo 21, da lared eo 30% euz al leoriou, hag a zo troidigezioù. 978 pajenn a ra ar re-mañ, da lared eo 9,3% deuz ar gont a pajennou a ra al leoriou en oll. Etre toud, eh eo 48 a referañsou (6,8%), oh ober 1.286 pajenn (12,2%) hag a zo bet troet diwar eur yez all bennag.

D'echui, eh eo 66 a referañsou, da lared eo war-dro 9,3% anezo, oh ober 2.400 pajennad bennag (da lared eo war-dro 22,7%), hag a zo bet embannet e diou yez, peurliesha brezoneg ha galleg.

DA GLOZA.

Sur a-walh, em-eus ankounahaet lakad eur skrid bennag e-barz roll ar bloavez 1986 : kaer e vez klask beza klok, e vez diéz beza. Emichañs, n'eus ket chomet re a gostez (3).

Ar justa posubl eh eo bet kontet an oll chifrou a-uz. Posubl e ve koulskoude e ve bet eur fazi bennag oh en em zila enno. Ingal eo : eun daolenn resiz a-walh a roont euz an embann brezoneg e 1986. War daou dra a zo da boueza eta, evid kloza.

E-keñver danvez, n'eus c'hoarvezet chenhamant ebed er skridou brezoneg e 1986 : disklêria a heller eo skridou a lennegezh ha diwar ar yez a vez techet bepred ar vrezonegerien da skriva. Renevezi a ra ar skrivagnerien, med ar memez doare skridou a vez savet ganto.

Daoust da ze, e weler chenhamanchou all o tond war-wel : nebeutoh a referañsou ha nebeutoh a gelaouennou a embanner, med muoh a bajennou. Evid pezh a zell ar pajennadur, dindan stumm leoriou eo e vez embannet bremañ ar peb brasa deuz ar skridou brezoneg : 68 leor ar bloaz, an dra-ze a ra 6 beb miz koulz lared (5,6 evid lavared mad).

Brest, d'ar 25 a viz du 1986.

NOTENN

(3) Pa h eo ar houlz din da gas an destenn-mañ da voulla, en em rentan kont n'em-eus ket laket "Keleier Bro-Leon hag an harzou" - eur gelaouennig renet gand Mikael Madeg e Sant-Tonan - e-barz ar roll. Re ziwезд eo avad evid ma vefe laket bremañ.

PRESENTATION

Les bibliographies des publications en langue bretonne des années 1973, 1974 et 1975, puis celle de 1983, ont, dans le passé, constitué quatre des numéros de la collection "Studi". De nouvelles méthodes de travail, faisant appel à un traitement informatisé, ont permis de réaliser cette année la bibliographie de 1986.

La présentation en a changé sur quelques points. Quelques modifications, en particulier, sont à signaler par rapport aux précédentes : tout d'abord, il n'y a plus, au chapitre "littérature," de sections spéciales pour les traductions : celles-ci sont désormais signalées, dans toute la bibliographie, par un astérisque *, avant le numéro de référence. De la même manière, les livres (tous genres confondus) sont signalés par un signe = placé lui aussi devant le numéro de référence. Lorsqu'une référence est bilingue, le titre est mentionné dans les deux langues.

* * *

Les bibliographies précédentes avaient déjà donné lieu à une exploitation statistique (1). De semblables observations statistiques peuvent être présentées concernant celle de 1986.

LES LIVRES.

En ce qui concerne le nombre de livres publiés, le chiffre en est de 68, soit très exactement 7 de plus qu'en 1983, année au cours de laquelle il en avait été édité un total de 61. Du coup, le chiffre de 1986 reste nettement supérieur à la moyenne de 32 ouvrages publiés chaque année de 1973 à 1975. Ceux de 1986 se répartissent de la manière suivante :

- 60 sont des livres "à proprement parler," mais 29, soit près de la moitié d'entre eux, ont moins de 50 pages, et 10 ont plus de 200 pages. Ceux dont la pagination est inférieure à 50 sont exactement aussi nombreux qu'en 1983 : ce sont surtout des livres d'enfants. Le nombre de ceux dont la pagination est supérieure à 200 ne progresse pas.

- 8 sont des numéros de périodiques consacrés à un seul auteur ou un seul sujet. La tendance à ne plus publier de numéros spéciaux de périodiques se confirme, probablement en raison des aides et facilités qu'il y a désormais à éditer des livres.

En ce qui concerne les livres "à proprement parler", 19 éditeurs - dont 2, il convient de le souligner, sont parisiens - ont été comptabilisés en 1986, alors qu'il n'y en avait que 10 encore en 1983. Mais il d'entr'eux n'ont publié qu'un seul ouvrage en breton. Le palmarès des autres éditeurs s'établit comme suit :

1. "Ar Helenner" : 14 titres
2. "Moulladuriou Hor Yezh" : 11 titres
3. "An Here" : 9 titres
4. "Al Liamm" : 4 titres
5. "Brud Nevez" : 4 titres
6. "Cholori" : 3 titres
7. "Keit vimp bev" : 2 titres
8. "Ar Skol Vrezoneg" : 2 titres

3 éditeurs ("Ar Helenner", "An Here", "Cholori") n'ont publié que des livres d'enfants. "Keit vimp bev", en outre, est spécialisé dans la BD.

LES REFERENCES.

En 1973, il avait été recensé un total de 930 références d'ouvrages et d'articles, et un maximum de 1.059 l'année suivante. Pour 1983, il n'y en avait que 787, ce qui représentait une diminution de 20% par rapport à la moyenne annuelle des années 1973-1975. Il faut noter une nouvelle régression pour 1986, puisque seulement 706 références ont été collectées pour cette année. Ceci équivaut à une nouvelle diminution de 10%.

Du point de vue du nombre des références, la plus grande part correspond, bien entendu, à des articles de périodiques : les 60 livres "à proprement parler" mentionnés précédemment ne constituent, en effet, que 8,5% du total des références, les articles en représentant 91,5%.

LES PERIODIQUES.

En 1986, il a été recensé seulement un total de 33 périodiques publiés en totalité ou partiellement en breton. C'est moins qu'en 1983 - il en avait été répertorié 39 cette année-là - et c'est bien moins que le maximum de 48 enregistré entre 1973 et 75. En fonction de leur pagination, on peut répartir ces périodiques de 1986 de la manière suivante :

- 15 ont publié moins de 10 pages de breton au total sur l'année
- 8 en ont publié de 11 à 100 pages
- 4 de 101 à 200 pages
- 6 plus de 200 pages.

Les titres les plus "épais" sont dans l'ordre : Brud Nevez, Imbourc'h, Hor Yezh, Al Liamm, Cholori, Nevez-Haŋv, Planedenn. Si l'on voulait classer ces périodiques en fonction du nombre de références que l'on y a répertoriées, c'est "Bremañ" qui arrive en tête (avec 125 références), suivi d'Al Liamm, Al Lanv, Brud Nevez, Cholori.

Par rapport à 1983, 12 titres n'existent plus, n'ont pas publié de texte breton ou ne sont pas parus en 1986, du moins à notre connaissance. Ce sont : L'Avenir de la Bretagne, Bleun-Brug, Chronique de Landévennec, Dastum, Dihun, Douar Breizh-République Bretonne, Evid ar Brezhoneg, an Nerzh, Le Pays Breton, Skol, Skrid, Telenhourien Vreizh. A l'inverse, il faut noter 6 nouveaux titres parus ou réapparus en 1986 avec des contributions en breton : Bro Nevez, Kumuniou Breizh, Kannadig Ker Vreizh, Nevez-Haŋv, Le Peuple Breton, Tabouliner.

Si les périodiques entièrement rédigés en langue bretonne n'existaient pas, il se publierait beaucoup moins de breton. Mais alors qu'ils étaient 18 en 1975, ils ne sont plus que 10 en 1986. Ils ont cependant fait paraître l'essentiel de la production écrite de l'année en cette langue, soit 70% des références hors-livres. Les 30% restant paraissent dans 23 périodiques "bilingues" - y compris dans des périodiques considérés comme "bretons" - dans lesquels la part du breton est généralement minime par rapport à celle du français ou, dans 2 cas, par rapport à celle de l'anglais.

LA PAGINATION.

Si l'on assiste à une diminution du nombre des livres publiés, du nombre de périodiques et du nombre de références collectées, par contre, la pagination moyenne des références continue à augmenter de façon sensible : de 5,6 en 1973, elle passait à 10,4 en 1983, et s'établit à 14,9 en 1986.

Le nombre total de pages publiés en breton en 1986 est en effet de 10.503, alors qu'il n'était que de 8.470, il y a trois ans (2). Ceci représente une progression de près de 25%. La régression des publications polycopiées se confirme, puisqu'elles ne représentent plus que 10,4% du total. Désormais, 90% de l'édition bretonne est imprimée, soit en composition classique, soit en offset.

En réalité, si l'on s'en tient au critère de la pagination, les parutions sous forme d'articles de périodiques sont nettement moins importantes que celles de livres. Les périodiques n'ont publié, en effet, en 1986 que 3.421 pages en breton, alors que la pagination totale des 60 livres "à proprement parler" est de 7.082, ce qui correspond à des pourcentages respectifs de 32,6 et 67,4%. Cette tendance était déjà perceptible en 1983; elle est inversée par rapport à la période 1973-75, où près de 75% de la production écrite de langue bretonne trouvait place dans des périodiques. La pagination moyenne d'un livre est de 118 pages, celle d'une référence paraissant dans un périodique de 5,3 pages.

LES AUTEURS.

On notera que 19% des références (soit 2.453 pages) sont anonymes. Le nombre des auteurs recensés s'élève à 323 pour l'année 1986, identique, à deux unités près, à celui de 1974, qui était le chiffre le plus fort des quatre bibliographies antérieures.

Le tableau suivant précise la répartition des auteurs en fonction du nombre de références à attribuer à chacun d'entre eux :

Nbre réf/auteurs	Nbre auteurs	% auteurs	% références
1	214*	66,3*	35,1*
2	53	16,4	17,4
3	22	6,8	10,8
4	13	4,0	8,5
	88*	27,2*	36,8*
5 et au delà	21*	6,5*	28,1*

Comme les années précédentes, les 2/3 des auteurs publient environ le 1/3 des références. Mais le pourcentage de ceux qui ont 5 références au minimum à leur actif a baissé - il était de 10,7% en 1983 - de même que le pourcentage de références à leur attribuer - il était de 46,5% en 1983. Par contre, le groupe intermédiaire s'est renforcé. Les auteurs qui publient de 2 à 4 références sont donc plus nombreux et publient une part plus importante des références.

Les auteurs les plus prolifiques en références sont :

- 26 : Tadevab
- 15 : Ar Stourmer

- 13 : Mikael Madeg
- 12 : Daniel Doujet, Paskal ar Marc'heg
- 9 : Mabedad
- 7 : Roparz Hemon, Perig Kof-Ruz, Yann Mikael
- 6 : Visant an Askol, M.K., Lukian Kergoat
- 5 : Laorans ar Bleiz, Per Diolier, Joel Donnart, Visant Fave, A. Heusaff, Yann-Fañch Jacq, Youenn Olier, Yann-Ber Tillenon, Treleger.

Le classement est différent, si l'on prend en compte le nombre total de pages publiées par chaque auteur :

- 1. Mikael Madeg : 605 pages
- 2. Per-Jakez Helias : 554
- 3. G. Ricou : 373
- 4. Abeozen : 361
- 5. Ronan Le Gléau : 352.

6 auteurs ont publié de 200 à 300 pages : R. Delaporte, Youenn Drezen, Roparz Hemon, Job Jaffre, F. Kervella, Jakez Konan. Une quinzaine d'auteurs ont publié de 100 à 200 pages : K. Brisson, F. Broudic, Cervantes, Per Denez, R. Gargadennec, Yann Gerven, Garmenig Ihuellou, Y.B. Calloc'h, L. Kergoat, le Père Médard, Y. Miossec, Meven Mordiern, Youenn Olier, Jef Philippe, etc...

Deux ou trois petites précisions supplémentaires méritent d'être signalées. Tout d'abord, que 67 pseudonymes ont été relevés dans l'index des auteurs : environ 20% des auteurs bretonnants s'expriment donc sous des noms d'emprunt. Ensuite, c'est que la production écrite de langue bretonne est essentiellement une oeuvre d'hommes. Si l'on met à part 11% des auteurs dont il est impossible de déterminer le sexe (auteurs collectifs, certaines signatures d'initiales, etc...), les femmes ne comptent que pour 10,2% des auteurs et ne sont en tout et pour tout que 33, alors que les hommes se comptabilisent à 255, soit 79%. 23 traducteurs, enfin, ont été recensés, les champions de la traduction étant Charles Le Gall (14 références) et Martial Ménard (6 références), pour des livres d'enfants.

Lors de la bibliographie de 1983, il avait déjà été mis en évidence un très grand renouvellement des auteurs par rapport à la période 1973-1975. Ce phénomène se confirme, puisque seulement 89 auteurs (soit 27,6%) ayant été publiés en 1983, l'ont été à nouveau en 1986. De même, seuls 44 auteurs ayant été publiés en 1973, le sont toujours treize ans plus tard, en 1986. Au total, 27 auteurs seulement sont présents chacune des trois années 1973, 1983 et 1986, ce qui ne représente que 8,4% des auteurs répertoriés pour la dernière année. La production écrite de langue bretonne se caractérise donc par un renouvellement constant de ceux qui l'alimentent.

LES ORTHOGRAPHES.

Il a paru intéressant de procéder pour la première fois à l'évaluation quantitative d'un problème qui occupe - avec beaucoup de passion - certains intellectuels bretonnants, à savoir celui de l'orthographe. Si l'on évite de prendre en compte quelques cas particuliers ou exceptionnels (édition en ancien KLT, édition double en vannetais et surunifié, etc...), les quatre principales orthographes en usage se répartissent de la manière suivante :

Orthographe	Références :		Pagination :	
	nombre	%	nombre	%
Interdial.	21	3,0	251	2,4
Vannetais	33	4,7	393	3,7
Surunifié	525	74,4	5548	52,8
Universit.	124	17,6	3928	37,4

Il ressort du tableau qui précède que les 3/4 des références publiées en 1986 le sont en orthographe "surunifiée", mais seulement un peu plus de la moitié des pages, avec une moyenne de 10,6 pages par référence. L'orthographe universitaire représente moins de 1/6 des références, mais plus de 1/3 de la pagination, avec une moyenne de 31,6 pages par référence. Les deux autres orthographes en usage, le vannetais traditionnel et l'interdialectale, sont bien moins représentées, tant du point de vue du nombre de références que du volume de pagination.

En ce qui concerne les ouvrages "à proprement parler", en 1986, 32 ont été édités en orthographe "surunifiée", pour un total de 3.245 pages, soit 30,9% du total de pages édités en breton. Le nombre d'ouvrages édités en orthographe universitaire est de 23, mais la pagination en est quasiment équivalente, puisqu'elle est de 3.133, en orthographe surunifiée est donc de 101 pages; celle d'un ouvrage en universitaire est de 136. Si l'on exclut les livres d'enfants, la moyenne d'un livre est de 132 pages en orthographe surunifiée, de 323 en orthographe universitaire.

En ce qui concerne les périodiques, 20 publient en "surunifiée" (70% des références et près de 22% de la pagination totale), 7 en "universitaire" (14,6% des références et 7,6% de la pagination), 4 en "interdialectale" et 1 en vannetais traditionnel. "La

"Liberté du Morbihan" est passée en cours d'année du vannetais traditionnel au "peurunvan".

Une très forte majorité d'auteurs, en 1986, a publié en "peurunvan", ainsi qu'en témoigne le tableau suivant :

Orthographe	Nbre auteurs	% auteurs
Interdial.	19	5,9
Vannetais	17	5,3
Surunifié	237	73,4
Universitaire	47	14,6

LA MATIERE.

Qu'a-t-on publié en breton en 1986, du point de vue du contenu des références ? Les différents chapitres de la bibliographie se répartissent de la façon suivante :

NOTES

(1) Pour des comparaisons complètes avec les années antérieures, le lecteur peut se reporter aux études parues en breton dans "Brud Nevez", n° 26 de 1979 et n° 83 de 1985, et à "La production écrite de langue bretonne de 1973 à 1983 : approche statistique", dans le tome LXII de 1985, des "Mémoires de la Société d'Histoire et d'Archéologie de Bretagne."

(2) Il convient de rappeler qu'une page est comptée comme... une page, quel qu'en soit le format, et bien qu'il puisse y avoir une différence appréciable entre une page de "Cholori" et une autre de "Hor Yezh", par exemple. Mais il serait très long et difficile de procéder autrement. Toutefois, les articles parus dans la presse quotidienne ou hebdomadaire régionale (par exemple "La Liberté du Morbihan"), sont comptés à raison d'une page chacun : suivant les périodiques, ils ne représentent que 1/8 ou 1/15 de page, mais par rapport à un périodique ordinaire en langue bretonne, ils sont l'équivalent d'une page entière.

Sections	Références		Pagination	
	nombre	%	nombre	%
Généralités	34*	4,8*	234*	2,2*
Religion	15*	2,1*	398*	3,8*
Sciences soc. dont Polit.	116*	16,4*	296*	2,8*
	54	7,6	193	1,8
Breton	94*	13,3*	2723*	25,9*
Arts, loisirs	54*	7,6*	55*	0,5*
Littérature	324*	45,9*	6033*	57,4*
dont Poésie	54	7,6	779	7,4
Théâtre	5	0,7	271	2,6
Romans	9	1,3	1305	12,4
Nouvelles	42	5,9	752	7,2
Essais	42	5,9	334	3,2
Souvenirs	9	1,3	1089	10,4
Enfants	76	10,8	711	6,8
Chansons	34	4,8	160	1,5
Critique	37	5,2	257	2,5
Histoire	28*	4,0*	331*	3,2*
Pays, peuples	31*	4,4*	403*	3,8*
Sciences, techn.	9*	1,3*	27*	0,3*

Les astérisques * qui suivent certains des nombres indiquent qu'il s'agit de totaux de sections. En 1986, comme les autres années pour lesquelles la bibliographie avait été réalisée, c'est la section de littérature qui est, de beaucoup, la mieux représentée avec près de 46% des références et 57% de la pagination. En seconde position, l'on trouve les sciences sociales et politiques, pour ce qui est de la pagination, c'est la section "breton et autres langues" qui l'emporte. Une seule autre section, celles des "arts et loisirs" dépasse le pourcentage de 5%, mais en ce qui concerne le nombre de références seulement. Toutes les autres sections sont présentes à un niveau inférieur à 5%, tant en ce qui concerne les références que la pagination.

Il est intéressant de détailler la section "littérature", pour observer qu'en nombre de références, c'est la littérature enfantine qui se place en tête, suivie de la poésie, des nouvelles et des essais. Il faut noter également que 9 romans ont été édités, ainsi que 42

nouvelles (en réalité 39, plus 3 recueils). En pagination, ce sont les romans qui sont en tête, suivis des souvenirs et de la poésie.

La même répartition doit être faite en ce qui concerne les livres. C'est l'objet du tableau suivant :

Section	Livres		Pagination	
	nombre	%	nombre	%
Divers	3*	4,4*	102*	1,3*
Religion	2*	2,9*	346*	4,4*
Politique	2*	2,9*	102*	1,3*
Breton	8*	11,8*	2281*	28,7*
dont Diction.	5	7,4	1565	19,7
Littérature	51*	75,0*	4760*	59,9*
dont Poésie	3	4,4	650	8,2
Théâtre	2	2,9	235	3,0
Romans	7	10,3	1127	14,2
Nouvelles	3	4,4	502	6,3
Essais	2	2,9	266	3,0
Souvenirs	4	5,9	984	12,4
Enfants	23	33,8	420	5,3
BD	2	2,9	48	0,6
Chansons	2	2,9	104	1,3
Contes	2	2,9	309	3,9
Critique	1	1,5	115	1,4
Histoire	1*	1,5*	150*	1,9*
Pays, Peuples	1*	1,5*	200*	2,5*

Les astérisques * indiquent toujours des totaux de sections. Mais le pourcentage des références et celui de la pagination sont calculés respectivement sur le total des 68 références (60 livres "à proprement parler" et 8 numéros spéciaux de périodiques) et des 7.942 pages concernées (7.079 pour les livres, et 863 pour les numéros spéciaux de périodiques).

Il apparaît avec netteté que les 3/4 des livres publiés en 1986 - 51 sur 68 - se classent dans la section "littérature". Les livres pour enfants sont, de loin, les plus nombreux, puisqu'ils représentent le tiers du total. Ils sont suivis des romans, puis de la poésie, des nouvelles et des souvenirs. 8 ouvrages, notamment des dictionnaires, concernent la langue bretonne elle-même. Ces derniers ont une pagination proportionnellement plus forte que les ouvrages à caractère littéraire.

Ces constatations renforcent celles qui avaient été établies à propos des bibliographies antérieures et sont une confirmation du fait que la production écrite de langue bretonne est essentiellement littéraire et linguistique.

Ajoutons à ce chapitre que 7 au moins des ouvrages sont des rééditions, et que 23, soit 30% de l'ensemble des livres, sont des traductions. Ces derniers représentent 978 pages, soit 9,3% de la pagination totale des livres. En tout, ce sont 48 références (6,8% de l'ensemble) qui ont fait l'objet d'une traduction d'une autre langue, pour une pagination de 1.286 pages (12,2% de l'ensemble).

Enfin, ce sont 66 références, soit 9,3%, représentant près de 2.400 pages (soit 22,7% du total) qui ont été publiées en version bilingue (généralement breton-français).

CONCLUSION.

Malgré des oublis inévitables (3), cette bibliographie de 1986 est aussi exhaustive que possible. Malgré des erreurs que l'on ne saurait exclure, les calculs de cette introduction sont aussi justes que possible. Ils donnent en tout cas un aperçu de la production écrite de langue bretonne pour l'année 1986. Deux observations peuvent être formulées en conclusion.

Cette production écrite de langue bretonne de l'année 1986 ne se différencie guère, dans son contenu, de celle des années précédentes. La dominante littéraire et linguistique qui la caractérise peut être considérée comme une donnée permanente de l'édition en breton. Le fort taux de renouvellement des auteurs semble être également une constante, mais il n'influe pas sur les genres qui sont abordés.

Différents indicateurs font néanmoins apparaître que des transformations sont en train de s'opérer. On publie moins de références et moins de périodiques, mais plus de pages. Si l'on s'en tient au seul critère de la pagination, c'est sous forme de livres que paraît désormais la plus grosse part de la production : 68 livres dans l'année, cela fait une moyenne de près de 6 livres par mois en breton (très exactement 5,6).

Brest, le 25 novembre 1986.

NOTE

(3) Au moment de transmettre ce manuscrit pour l'impression, je me rends compte ainsi que "Keleier Bro-Leon hag an harzou", publié à Saint-Thonan par Mikael Madeg, n'est pas inclus dans cette bibliographie. A ce stade, il n'est malheureusement plus possible de l'inclure.

()
 () ROLL AL LEORIOU BET EMBANNET E 1986 ()
 ()
 () Index des livres publiés en 1986 ()
 ()

Amañ e vo kavet roll an 60 a leoriou "gwir" hag an 8 a niverennoù ispisial a gelaouennoù a zo bet moulet e 1986. Renket int bet dre zavez. Dirag al leoriou gwir, eo bet laket ar ziv =. Dirag an troidigeziou, zo eur steredenn *. An niverenn, e penn kenta al linenn, eo hini ar roll dre vraz.

Cet index comprend les 60 livres "à proprement parler" et les 8 numéros spéciaux de périodiques publiés en 1986, classés par section. Les 60 livres sont précédés du signe =. Les traductions sont signalées par une astérisque *. Le chiffre en tête de ligne renvoie à la bibliographie générale.

A BEB SEURT. Divers.

=====

1 BROUDIC (F.). - Roll al leoriou hag ar pennadoù bet embannet e brezoneg e 1983 = Bibliographie des publications en langue bretonne : année 1983. - 109 p.

= 30 Bloavezh 1987 / Tresadennoù gand Serge Kergoat. - Heb pajennadur.

= 34 SKOL AN EMSAV. - Deiziataer 1987. - Heb pajennadur.

RELIJION. Religion.

=====

= * 36 Ar Bibl. 5. Al levriou eilkanonel. - 250 p., sk.

48 O. (Y.). - Beaj "Kristenion Breizh" e Kernev hag e Kembre e 1985. - 96 p.

POLITIKEREZ. Politique.

=====

= 62 Gwynfor Evans e Breizh. - 200 p., sk.

85 OLIER (Youenn). - Notennoù politikel. Atadennoù. - P. 159-234.

BREZONEG. Langue bretonne.

- =====
- = 172 Dictionnaire breton. Breton-français/français-breton / sous la direction de Per-Jakez Hélias. - 816 p.
- = 173 DELAPORTE (R.). - Geriadur brezhoneg-saozneg. - 215 p.
- 176 GARGADENNIG (Roje). - Geriou ha troiou-lavar dastumet e Pont-e-Kroaz. Eil lodenn. - 98 p.
- = 179 GUILLEVIC (A.), LE GOFF (P.). - Geriadurig brehoneg-galleg. - 84 p.
- = 180 LE GLEAU (R.). - Dictionnaire classique français-breton. Levrenn 3. DEBLA-EMBEG. - 352 p.
- = 195 MADEG (Mikael). - Desevel bugale e brezoneg. - 522 p.
- = 209 C'hoari e brezhoneg. - 86 p. (fichennou).
- 213 NONO, PERNEZ (D.), JOUIN (B.). - Lanig ha Nolwenn. Livret 2. Exercices de conversation en langue bretonne. Bandes dessinées. Exercices structuraux. - 108 p., sk.

BARZONEGOU. Poésie.

- =====
- = 341 KALLOC'H (Yann-Ber). - Ar en deulin = A genoux. - 253 p.
- = * 356 RICOU (Guillaume). - Fablennou Ezop ha Fedr. - 373 p.
- = 368 DENEZ (Per) (et alia). - Barzhonegoù. - 152 p.

PEZIOU-C'HOARI. Théâtre.

- =====
- = 371 MEVEL (P.M.), ROZMOR (Naig). - Peziou-c'hoari. - 144 p.
- * 372 PLAUTUS (T. Maccius). - Ti an Tasmant / Tr. Ab Goelo hag Ernest ar Barzhig. - 91 p.

ROMANCHOU. Romans.

- =====
- = 374 BRISSON (Kristian). - Skeud. - 122 p., sk.
- = 376 GERVEN (Yann). - Brestiz o vreskenn. - 120 p.

- = 377 HEMON (Roparz). - Troiou-kaer ar baron Pouf. - 158 p., sk.
- = 378 IHUELLOU (Garmenig). - Argantael hag ar spes. - 127 p.
- = 379 JAFFRE (Job). - Yann ar Baluc'henn / kempennet evit an embann get Daniel Doujet. - 255 p.
- = 380 KONAN (Jakez). - Kenavo, Amerika. - 168 p.
- = 692 ROH VUR. - Loeiz Lezongar. - 139 p.

DANEVELLOU. Nouvelles.

- =====
- = 382 ABEOZEN. - Pirc'hirin kala-goatv. - 206 p.
- = 392 DREZEN (Y.), BRENNIGER, BAUDU (M.), PRIEL (J.), (...). - Danevellou. - 169 p.
- = * 407 Marvailhou ar bed oll / Sk. Danièle Jégo, tr. Martial Ménard. - 127 p., sk.

ESEDOU. Essais.

- =====
- = 425 ABEOZEN. - Abeozen, kelaouenner. - 155 p.
- = 431 DREZEN (Y.). - Youenn Drezen, kelaouenner. - 111 p.

ENVORENNOU. Souvenirs.

- =====
- 471 An douarou etal ar mor. Komzou ur beisantes ag an Arradon / dastumet ged Armelle Audic. - 138 p., sk..
- = 472 HELIAS (Per-Jakez). - Marh al Iorh. Envorennou eur Bigouter. - 532 p., sk. -
- = 473 MEDAR (Tad). - Paotred an ognon / Rakskriz gand Naig Rozmor. - 186 p., sk.
- = 475 MORDIERN (Meven). - Istor ur c'halvedigezh. - 128 p.

LEORIOU BUGALE. Littérature enfantine.

- =====
- = * 487 BOLLIGER (Wilfried). - An tigr ne felle ket dezhañ bezañ tigr ken / Tr. Martial Ménard. Skeudennou gant Antonella Bolliger-Savelli. - 18 p., sk.

- = 489 Choloc'hoari 3.
- = 496 DIVY. - Loupig a ra tro ar bed. - 28 p., sk.
- = 498 DOUJET (D.). - Istorioù ar Roue kofok. - 32 p., sk.
- = * 501 ESCUDIER (Laurent). - Pouloud o klask mignoned / Tr. Martial Menard. - 10 p., sk.
- = * 502 ESCUDIER (Laurent). - Kaiak an eskimo bihan / Tr. Martial Menard. - 10 p., sk.
- = 504 Ar gouerien da vare ar Gelted kozh. - 30 p., sk. -
- = * 527 MELL (Thierry). - Périg hag e groenn / Tr. Martial Menard. - 10 p., sk.
- = * 528 MELL (Thierry). - Al Labous plouz / Tr. Martial Menard. - 10 p., sk.
- = * 693 Gwalennig Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 694 Gwastell Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 695 Kounnar Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 696 Leor Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 697 Medisin Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 698 Medisin-dent Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 699 Pesk Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 700 Pour Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 701 Ski Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 702 Sonerez Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 703 Sportou Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 704 Trubuillou Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.

- = * 705 Velo Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.
- = * 706 Yer Odilon / Brezoneg gand Charlez ar Gall. - 16 p., sk.

BANNOU TRESET. BD.

- = 541 JACO (Y.F.), ESCUDE (L.). - War roudou an den dizanv. - 48 p., sk.
- = 542 MEUR (Jord ar). - Hiwel, an harluad. - 48 p., sk.

KANAOUENNOU. Chansons.

- = 554 HEMON (Roparz). - Kanaouennoù. Trede levrenn / sk. Brenda Andouard. - 80 p. sk.
- = 556 KALVEZ (Tugdual). - Kanaouennoù a wechall evit bugale a vremañ. - 24 p., sk.

LENNEGEZ-POBL. Littérature populaire.

- = 582 LE GOFF (Pierre). - Oeuvres / kinniget get Jorj Belz. - 311 p.
- = 586 Pa ri ti to = 1000 proverbes bretons par 2000 petits Léonards. - 200 p., sk.

STUDIADENNOU LENNEGEZ. Etudes littéraires.

- = 620 PHILIPPE (Jef). - War roudou Merlin e Breizh. - 115 p.

ISTOR. Histoire.

- 630 KERGOAT (Lukian). - Pleustradennoù istor. 8vet ha 7vet klas. - 150 p., sk. -

BROIOU AR BED. Pays du monde.

- = 675 KERVELLA (Fransez). - Dindan gouriz ar bed. - 200 p.

(
 (ROLL AN TIEZ-EMBANN)
 ()
